

— 282 —

**Eil Guerzen**

Cheleu et hag é kleu e et ha kleu et e - hre et -  
— Ha me ia de - gon tein d'oh ur vraù ig a ne ueted.

I

Cheleuet hag é kleueet ha kleuet e hreet,  
Ha me ia de gontein d'oh ur vraüig a neuétéed.

II

Ha me ia de laret d'oh ur vraüig a neuétéed  
Diar Mab er Hlohour a Velrand, larér, é ma sauet

III

Diar Mab er Hlohour a Velrand, larér, é ma sauet  
Hag en des paset er blé-men kapitén chouañned.

IV

E Bihui, é kreiz er vorh, larér é hes un davarn  
E oé abarh 'ivet, un dé, un naù pé dek jandarm.

V

Arriù Mab er Hlohour én ti, èl ma oé ur pautr diaul  
Ean laret d'en davarnouréz : « Tennet chistr ar en daul ».

VI

» Kaset tregont chopinad chistr ha ne veet ket soéhet  
» M'em es kameraded arlerh hag en des hoah séhed

VII

Er jandarmed e oé ino e gomans um sellet :  
« Mal é d'emb-ni monet arauk ; chetu er chouañned »

VIII

Nag a ino pe lamezas, de Gerveur Guern é has ;  
Etré unek eur ha kreiz noz sauet un revolt bras.

— 283 —

IX

Etré unek eur ha kreiz noz, sauet ur revolt bras,  
Mab er Hlohour oé ér sulér saillet a blom d'en ias.

X

Rah er garnizon a Bondi, soudarded, jandarmed,  
Nag e oé deit de Gerveur Guern de dapein chouañned.

XI

Pemp dén armet ha tri uigent ér porh e oé tolpet,  
Mab er Hlohour, dré er lukan, 'n ou mesken doé saillet.

XII

Ean e saillas 'n ur venaleg hag e lauskas deu dén :  
— Soudarded, deit rah ar me lerh ha hui me iondr korden !

XIII

E pas édan un avalen, ino doé bet un len,  
Ha ean monet hag achapet de guhet de Geluen.

XIV

Meit a pe oé Mab er hlohour seuel doh lann Keluen  
Er goed e ridas anehon ér méz èl ur blomen.

XV

A pe oé arriù é Keluen ean monet d'er porched :  
« Intron Varia a Geluen sikouret, mar karet.

XVI

Intron Varia a Geluen sikouret, mar karet.  
Rak ma ne garet me sikour me zo un dén kollet, »

XVII

Nag a ino monet e hrs de gavet er huré  
Aveit arestein é hoed ; rak allas ! goannat e hré.

XVIII

Nag a ino hoah pe lamas na de Bondi é has  
De gavet er mestr jandamed, en eutru Lavias.

XIX

Dé mat d'oh, eutru Lavias, guerso é kleuan laret  
E oh é klah Mab er Hlohour ha n'en anauet ket.

XX

Mar doh é klah Mab er Hlohour, èl ma kleuan laret  
Mar karet eutru « brigadier » me hrei d'oh or havet.

— 284 —

---

### XXI

— Pe houiehen mé, dén ieuank, lareheh ket ur geu  
Me rehé d'oh chistr de ivet friko lan hou poelleu.

### XXII

Pe oé Mab er Hlohour én ti, oé èl ur hah fouëtet,  
A pe oé deit ar er pavé, ur diaul diranjennet.

### XXIII

A pe oé deit ar er paùé ean stoké é voteu :  
Chomet geté digor ou beg èl un nebed léieu.

### XXIV

Ean e laras d'er iondr korden : « Mé é Mab er Hlohér  
Deit ar me lerh bremen léieu, rak è han mé d'er gér »

### XXV

Nag a ino monet e hrs de gosté Sant-Brieg.  
Hag ur jiboësourig ieuank en doé ean bet treiset.

### XXVI

Mab er Hlohour a vorh Melrand oé ur jiboësour mat,  
Ean e gemér é fuzillen eit mont de jiboësat.

### XXVII

Er jiboësourig ieuank-hont henneh oé ur pautr fin  
Hag e daspas Mab er Hlohour é ivet ur huéh guïñ.

### XXVIII

Dé mat d'oh jiboësour ieuank, jiboësour èl ma omb.  
Damb bremen, hon deu, d'en davarn de ivet beb a lom.

### XXIX

P'ou doé antréet barh en ti : « Cherret klos en orieu !  
Chetu, Mab louañ er Hlohour, achiuet hou farseu. »

### XXX

Ind dap ur gorden ar é houg, un aral ar é skoé,  
Hag ind er stagas doh un trest, èl ma vé groeit d'ur lé.

### XXXI

« La achiù é er hours, eidoh de hobér hou farseu ;  
Bremen é vo ret d'oh monet d'achiù d'er galéieu... »